

D'ar 24 a viz Eost

- Er Iañ kantved, en Artaksaka en Armenia, merzherenti sant Bertele pe Natanael, abostol. Genidik eus Kana e voe kinniget gant e vignon Fulub da Jezuz en e gevarc'has kercent evel "ur gwir Israelad ha n'eus ket a douellerezh ennañ." Ha diouzhtu e tisklêrias e feiz er C'Hrist "Mab Doue, Roue Israel" (Yn 1,47) hag e voe kontet e-touez an Daouzek Abostol. Goude an dasorc'h e kemeras perzh er pesketaerezh burzhudus. Hervez an hengoun e voe abostolour Bro-Armenia gant sant Tomaz ha sant Jud. Merzheriet, e voe digroc'hennet ez vev.
- E 258, en Utica e Tunizia, da vare heskinadeg Valerianus, Merzherion Massa Candida, bet meulet gant sant Eosten ha sant Kiprian Kartaga. Tri c'hant kristen e oant, a gavas gwelloc'h bezañ dêvet ez vev e fornioù eget dêviñ ezañs d'an idolennoù goullo.
- E 685, sant Ouen pe Dadon (Lt. Audoenus), eskob Rouen. Goude bezañ kejet gant sant Koulm a oa bet degemeret gant e dad Autharius, kont frankat hag amaezhour meur ar roue Klotar II, e tilezas e gargoù uhel e Neustria evit diazezañ e 637 abati Resbais hiziv Rebais. Anvet eskob Rouen e kendalc'has da harpañ ar vanac'helezh gant e vignon sant Eloa. D'an hevelep deiz e reer koun eus e vreudeur :
 - sant Adon a lakaas da zont menec'h eus Luxovium evit diazezañ e 630, e Saltus Jotrum, hiziv Jouarre, un abati daouel a fizias da c'houde e santez Teodekild.
 - sant Radon a voe diazezeur manati Radolium, hiziv Reuil-en-Brie.
- E 1826, e Napoli, santez Jeanne-Antide Thouret, gwerc'hez, diazezeur Kongregadur Leanezed ar Garitez Besançon he eskobiezh c'henidik. Edo o paouez mont tre e kouent leanezed ar Garitez pa voe berzet an ensavadurioù relijiel gant an Dispac'h Gall. Kenderc'hel a reas gant un nebeud keneilezed d'ober war-dro ar vugale dilezet, ar re baour hag ar re glañv. Goude trubuilhoù bras e varvas en harlu e Napoli.
- E 1856, e Marsilha, santez Emilie de Vialar, gwerc'hez, diazezeur leanezed Sant-Jozef an Emziskouezadenn. Gant ar preder da embann an Aviel dre ar bed holl e tiazegas ouzhpenn daou ugent kouent eus Afrika an Hanter-noz betek Birmania.
- War enez Vreizh (Bro-Skos), er Vvet kantved, sant Yrchard, beleg skosat, diskibl sant Ternan, abostolour ar feiz e-touez ar Bikted.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Padrig Rosdallán pe «an hini Yaouank», diskibl sant Padrig. Anvet e vez ivez Sean-Phadraig, « Henbadrig ».

D'ar 25 a viz Eost

- War-dro 260, e Roma, merzherenti ar sent Nemesius ha Lucilla. Ganet dall, merc'h an diagon Nemesius, Lucilla a voe badezet gant ar pab sant Stefan Iañ ha pareet e-doug al lid pezh a lakaas kalz a dud da dostaat ouzh ar feiz ha da c'houelle d'o zro ar vadeziant. Pa voe kelaouet an impalaer Valerianus e c'hourc'hemennas karc'hariañ Nemesius hag e roas Lucilla d'ur vaouez drouk. Da c'houde e voent kaset da dempl Meurzh lec'h ma voe dic'houzouget ar plac'hig dirak he zad a voe eñ dibennet.
- Er IVre kantved, e Roma, merzherenti sant Genez. Dremmour eus e vicher edo o c'hoari en un doare dismegañsus ha goapaus ur pagan o resev ar vadeziant pa voe gonezet d'ar C'Hrist. Goude bezañ disklêriet e feiz dirak an holl e dibenn an arvest e voe bac'het, jahinet ha dibennet dre ma talc'has betek penn.
- War-dro 500, e Septimania distro da Zoue ene sant Sever, abad Agde, kelenner sant Masent. Genidik a Vro-Siria e teuas da avelañ ar kreizteiz Okitania hag e savas ur manati lec'h ma varvas.
- War-dro 665, santez Patrisia a Napoli. Hag hi priñsez eus Kêrgustentin e tec'has da Roma evit parraat ouzh dimeziñ hag e tegemeras gouel ar gwerc'hez digant dorn ar pab Liber. Goude marv he zad e tistroas da gKêrgustentin evit dasparzhañ he madoù d'ar beorion kent distreiñ en Italia ha mervel e Napoli. Eno e virer un orselad eus he gwad a zeu da liñvennañ a-vareadoù resis evel hini sant Genver.

- E 765, e Bro-Saoz, sant Brewen (Bregwin ; Gg. Brévin), arc'heskob Kêrgent. Genidik eus Bro-Saks e oa mignon sant Lull eskob Mainz.
- E 775, sant Gregor Utrecht, eskob. Genidik eus Trier e Germania ez eas, hag eñ krennard c'hoazh, da heul sant Bonifacius o vont da avielañ Bro-Hessen ha Thuringen hag e voe anvet gantañ abad Sant-Varzhin Susteren el Limbourg hag eskob Utecht.
- E 1270, e Tunis, sant Loeiz, roue Bro-C'hall. Koulz en e rouantelezh hag er groaziadeg e tiskouezas Loeiz IX a Vro-C'hall ur feiz oberiant, ur yonded divrall er renadurezh, ur garantez wirion evit ar beorion hag an dalc'husted en eneberezh. Eus e zimeziñ gant Marc'harid a bProvañs en devoe eizh bugel a voe desavet a-zoare hag en deoliezh. Evit kehelañ ar Groaz Santel, ar Gurunenn Spenn hag ar Bez Santel e tispignas e vadoù, e nerzh ha betek e vuhez o vervel diwar ar vosenn e-tal Tunis. Un hengoun e Bro-Tunizia a zanevell ne vefe ket marvet eus ar vosenn pa oa o lakaat ar seziz war Gêr-dTunis, met en defe kentoc'h kuitaet e lu evit mont da benitiour war un uhelenn nepell diouzh Tunis, lec'h ma varvas en digenvez.
- E 1471, en Izelvroioù, ar gwenidik Tomas a Gempiz, beleg. Mont a reas e manati Breudeur ar Vuhez Kumun d'e c'hwezhek vloaz war ar Menez Santez Oanez e-kichen Zwolle. Diwar skridoù ar c'hevrinour flañdrezat Geert Grote, kentradour an Devotio Moderna, e savas an De imitatione Christi a voe kevyezhbet buan dre holl en Europa.
- E 1648, e Roma, sant Jozef a Gazalañs, beleg spagnolat, diazezour. Goude bezañ bet beleget en Aragon, e vro c'henidik, ez eas da Roma hag e tiazegas eno ur gumuniezh a leaned reizh anvet Piaristed gouestlet da gelenn ar bobl dre ar skolioù.
- E Breizh, e 1057, sant Gurloez pe Urlo, abad kentañ Langroaz Kemperle e 1029 goude bezañ bet priol abati Redon.
- E Breizh, e 1088, sant Yugoñvarc'h, abad Langroaz Kemperle eus 1059 da 1066, goude bezañ bet priol abati Roazhon.
- En Iwerzhon sant Michan, manac'h e Dulenn.

D'ar 26 a viz Eost

- War-dro 295, e Roma, merzherenti sant Maksimilian, sebeliet war ribl ar Via Salaria.
- War-dro 303, merzherenti sant Adrian, genidik a Vro-Nikomedia, ofiser eus al lu roman lakaet d'ar marv da-geñver heskinadeg Diocletianus. O welout kalonegezh didrec'hus 23 den kristen edod oc'h heskinañ e voe gonezet a-greiz-holl d'ar C'Hrist hag e c'houlennas bezañ kontet e-touez ar Gristenion.
- D'an hevelep deiz, merzherenti santez Natalia pe Natacha Nikomedia, gwreg sant Adrian, en em ouestlas e servij ar gristenion heskinet.
- War-dro 542, sant Kezaer, eskob Arlez. Goude bezañ bet manac'h war enezenn Lerina e voe anvet eskob en despet dezhañ hag e chomas en e garg daou ugent vloaz. Sevel a reas prezegennoù evit e veleion, kanonoù c'hwec'h senez lec'hel, reolennoù evit ar venec'h hag ar manac'hezed. Bras e voe e levenzon war Gallia ar c'hornog ha Bro-Spagn.
- E 1878, e Betleem, santez Maria eus Jezuz Kroazstaget, gwerc'hez, karmeziadez. Ganet e voe Marie Baouardy en un tiegezh libanat o chom e Palestina, d'ar mare-se en impalaeriezh ottoman. Kollet ganti he zud pa oa tri bloaz e voe degemeret e ti un eontr a dec'has dioutañ pa glaskas he dimeziñ hag e kavas repu e ti ur muzulmad. Dre ma nac'has disteurel he feiz e voe dic'houzouget gantañ ha lezet evel marv hogen e tihunas en ur vougev le'h ma voe prederiet e-pad meur a viz gant ur vaouez gwisket e glas a anavezad evel ar Werc'hez Vari. Ur wezh pareet ez eas da vatezh hag e vevad en Aleksandria, Jeruzalem ha Beyrouth betek degouezhout d'he naontek bloaz e Marsilha lec'h ma'z eas da leanez. Goude daou vloaz e voe aliet da vont d'ar C'Harmez e Pau. Kaset gant leanezed all da ziazezañ ur c'harmez e Mangalor en India ha goude-se e Betleem e tiskouezas ar garitez uhelañ en ur vuhez leun a c'hraoù kevrinel hag a radwerc'hioù souezhus evel an diouganañ, an dibrad hag an daourevoud.
- E 1952, e Kharsk Siberia, ar wenvidigez Laorenza Leokadia Harasymov, gwerc'hez ha mer-

zherez. Leanez eus C'hoarezed Sant Jozef, Kongregadur ukreinat gant lid reterek, e voe hangaset en ur c'hamp labour lec'h ma talc'has da reiñ testeni d'ar feiz en aozioù buhez kriz-meurbet betek ar marv.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Edern, beleg penitiour, en Edern hag e Lannedern lec'h ma varvas. Geniik moarvat eus Kembre e teuas d'an Arvorig gant e c'hoar Genovefa. Evel sant Teliav e vez diskouezet a-c'haoliad war ur c'harv.

D'ar 27 a viz Eost

- War-dro 387, en Ostia, santez Monika, mamm sant Eosten. Ganet e rannbarzh roman Numidia, hiziv en Algeria en un tiegezh berber romanaet ha kristen, e voe dimezet yaouankik flamm gant he zud d'ur pagan anvet Patricius. Hag eñ madelezhus hogen gadal ha brouezus e voe gonezet d'ar feiz ha badezet a-raok e varv. O fevar bugel a voe desavet er feiz hag e skuilhas ar vamm santel kalz daeroù dirak Doue pa bellaas he mab henañ Eosten diouzh feiz e vugaleaj. Hogen e voe e barr al levenez pa voe gonezet d'ar feiz goude ur vuhez diroll ha badezet gant sant Ambroaz Milano. P'edo o vont da zistreiñ d'an Afrika e kuitas an douar-mañ e porzh Ostia, e-kichen Roma, gant ur c'hoant bras eus an neñv.

- War-dro 450 e Tebaid, sant Poemen pe Pimen, abad. Bez' e voe unan eus skoueriusañ penitiourion gouelec'h Skete ma vez lakaet war e anv ur bern lavarennoù-stur ("apophtegmoù") leun a furnez.

Er C'hornog e vez enskrivet gouel sant Adrian d'an 8 a viz Gwengolo koulskoude eo dereat e lidañ e Breizh evel ma vez graet er Reter en dezi-mañ, 26 a voz Eost, a-gevret gant e wreg santez Natalia.

- E 1159, sant Amadeus (Gl. Amédée), eskob Lausanne e Bro-Suis. Da gentañ manac'h e Clairvaux e voe abad Hautecombe araok bezañ dibabet evit sez Lausanne lec'h ma splannas e santelezh en ur wazhiadezh frouezhus.

- E 1794, merzherenti ar gwenvidig Yann-Vadezour Souzy vikel-vras ar Rochelle hag e gavandidi, Merzherion Pontonoù Roc'hkreñv, pevar a tri ugent anezho, beleion ha leaned, bet gwenvidikaet e 1995 gant Yann-Baol II, en o zouez tri beleg dezho liammoù gant Breizh hep bezañ Bretoned a orin.

- An Tad Gabriel Pergaud, lean, genidik eus bro Gueret e Bro-C'hall, priol abati Beaulieu e Megrit, damdost diouzh Dinan.

- An Aotroù beleg Frañsez Mayaudo, ganet en eskopti Perigueux hag a voe ur mare chaloni e Sant-Brieg a-raok mont da Soissons.

- An Aotroù beleg Pêr-Jozef Le Groing de la Romagère, ganet en eskobiezh Moulins, breur d'an Aotroù eskob Mazheas Le Groing de la Romagère hag a voe eskob Sant-Brieg adal 1817 betek 1841.

- En Iwerzhon, sant Uzel, eskob, diskibl sant Padrig.

- E Bro-Skos, war-dro 1040, merzherenti sant Malrub, penitiour a voe lazhet gant Merns er c'hKincardineshire gant alouberion Norge a freuze ar vro.

- E Kembre, e Usk, e 1679, merzherenti sant David Lewis, beleg jezuist. Ganet e Abergavenny, Monmouthshire e Kembre e voe beleget e Roma hag e tremenas tregont vloaz en e vro o lidañ ar c'hevrenennoù dre guzh hag o sekour ar beorion. Diskuliet gant ur c'houblad renavidi e voe kondaonet d'ar marv ha krouget da vare ar roue Charlez II a Vro-Saoz.

- E Breizh, er XVIIvet kantved, ar bac'hiadez Klaoda Belleg, intañvez eus Douarnenez, diskiblez Dom Mikael An Nobletz.

D'an 28 a viz Eost

- E 430, distro da Zoue ene sant Eosten, eskob Hippona, doazhour eus an Iliz. Goude ur vuhez den yaouank trubuilhet a-fet mennozhioù relijiel ha buhezegezh e voe gonezet d'ar feiz katolik ha badezet gant sant Ambroaz Milano d'e 33 bloaz. Neuze, o tistreiñ eus Afrika e krogas gant un nebeud mignoned da ren ur vuhez kumuniezhel gouestlet d'ar bedenn ha d'ar studioù. Diuzet da eskob Hippona en em ouestlas e-doug 34 bloaz d'e dropellad dre e brezegerezh, e skridoù fonnus ma stourmas taer enno enep fazioù e amzer.

- En IIIde kantved, da vare heskinadeg Decius, merzherenti sant Juluan Brioud, milour evel e vignon sant Ferreol.
- Er VIIvet kantved, nepell diouzh Sevilla e Bro-Spagn, santez Florentina pe Florenza, gwerc'hez, abadez. Hag hi emzivadez yaouank e voe desavet gant he zri breur ar sent Leandr, Izidor ha Fulgentius. Aet da vanac'hez ha deuet da vezañ abadez Astigi, e vreudeur a zedias dezhi pleustradoù a gelennadurezh.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Maelor, eskob abad.
- E Breizh c'hoazh, er VIIvet kantved, distro da Zoue ene sant Elouan pe Louan, Iwerzhonad, penitiour e koad Pourc'hoad ha goude e Sant-Gwenn e-kichen Mur lec'h ma weler e vez stok ouzh ar chapel gouestlet dezhañ.
- En Iwerzhon, sant Felim (Iw. Feidhlimidh), VIII vet -IX vet - kantved, eskob Caiseal, roue Mumhan, aet da benitiour.

D'an 29 a viz Eost

- Merzherenti sant Yann-Vadezour a ziskouezas ar C'hrist, Oan Doue, d'e ziskibion, hag a yeas a ziwar-wel gant izelegezh. Bac'het e voe gant ar roue Herodez a roas urzh d'e zibennañ war c'houlenn e verc'h Herodiad. An Diaraoger koulz dre e varv ha dre e vuhez en doe roet testi eus ar wirionez a zo ar C'Hrist Jezuz.
- War-dro 126 e Vindinia en Ombria, da vare Adrianus, merzherenti santez Sabina. Intañvez ur patrikian anvet Valentinus, e voe gonezet d'ar feiz gant he matezh Seraphia a voe lakaet d'ar marv en abeg d'he feiz. Ha dre ma voe kavet ouzh he sebeliañ e voe kaset Sabina d'al lezvarn lec'h ma voe kondaonet en abeg d'he dispri d'an doueoù. Gouestlet e voe dezhi ur brientiliz war an Aventin e Roma lec'h m'az eo brudet he c'hehelerezh.
- War-dro 693, sant Sebb, roue Essex e Bro-Saoz. Hervez sant Beda e oa graet kentoc'h evit bezañ eskob eget roue hag e vennas mervel pourc'haet gant ar sae vanac'h en doa c'hoantaet kement e-kerzh e vuhez.
- War-dro 700, sant Mederig pe Merry, abad. Ne oa nemet trizek vloaz pa voe fiziet e manati Sant-Andrev Augustodunum, e c'hêr c'henidik. Dibabet da abad gant ar venec'h ez eas prestik goude da benitiour en ur c'hoad, hiziv La Celle Saint Merry, lec'h ma teuas diskibled niverus. Mont a reas neuze da Champeau ha diwezhatoc'h da Bariz e-kichen bez sant Siforian a oa en iliz sant Jermen ar Pradeier. Eno e varvas o lezel e anv da barrez Saint-Merry.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Gwizhur Kambon, diskibl sant Varzhin Gwerzhav ha penitiour e Kambon e Bro-Naoned.
- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Finnan, diskibl sant Padrig.
- E Breizh, e 1870, e Sant-Pern en eskobiezh Sant-Maloù, ganedigezh en neñvoù, santez Mari ar Groaz, Janed Jugan eus he anv badez, gwerc'hez, diazevourez C'Hoarezed Bihan ar Beorion. Genidik eus Konkaven e oa matezh pa grogas gant ur vatezh all da reiñ degemer da ziv vaouez kozh ha digenvez, pezh a voe penn-kentañ ar gengregadur. Dizarbennet en un doare amzere eus he c'harg a superioerez ne glemmas tamm-ebet hag e asantas distreiñ da gesterez evit ar re gozh.

D'an 30 a viz Eost

- E 410, distro da Zoue ene sant Pammachius, feizvonnour. Senedour roman, leun a feiz, brokus ha madelezhus, e reas eus e zi ur manati gwirion hag e savas ur brientiliz war ar menez Caelius.
- E 650, sant Agilus (Gg. Agyle, Ayeul, Aile), abad. Hag eñ mab Arnoald, uheliad frank e lez Childeberzh Iañ, e wiskas ar sae vanac'h e Luxovium dindan sant Koulman hag e ambrougas sant Eustaz aet da avialañ Bavaria. Galvet e voe gant sant Ouen da gemer penn abati Rebais, nevez savet gantañ e-kichen Melda (Meaux).
- E 1954, ar gwenvidig Ildefoñs Schuster, manac'h beneadat, kardinal-eskob Milano. Ganet e 1880, e reas e ouestloù kerkent hag e ugent vloaz en abati Sant-Paol-er-maez-Mogerioù e Roma lec'h ma

voe abad diwezhatoc'h. Anvet eskob Milano e 1929 e voe skedus e furnez da-geñver trubuilhoù politikel e amzer. Skrivet en deus meur a levr a-zivout al liderezh gant addisplegadennoù ar Skritur Sakr.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Rumon pe Ruvon, eskob, keneil sant Kae ha sant Fili e Glad-an-Hañv hag e Kernev-Veur, kelennet en Avallon.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Bodvael, manac'h, diskibl sant Maodez, keneil sant Tudi.

- Er VIIvet kantved, merzherenti sant Devan, manac'h brezon (kembreat), penitiour e Dunster (Glad-an-Hañv).

- War-dro 670, e Breuil en eskobiezh Melda, sant Fiakr pe Fieg (Iw. Fiach, Lt. Fiacrius, Fiacrus), penitiour iwerzhonat, paeron al liorzhourion. Da gentañ penitiour e Cill Fiachra en Iwerzhon, e voe kelennet gant sant Konan. Da c'houde ez eas gant he c'hoar santez Sira d'en em staliañ e-kichen Melda e Bro-C'Hall lec'h ma voent degemeret gant sant Faron, eskob ar gêr-se, a roas bod ivez da sant Killan.

